

Kanaouen ²⁵⁰

a Labourer Douar

Var don : *Kimniad ar Zoudard yaouank*

I

Kanomp gant joa eur ganaouen,
Ennhenor da labourerien,
E vag bemdez dre ho labour
Ar pinvidic coulz ag ar paour.

II

Gouëchal goz ar batriarched,
Ar rouanet ag ar brincet,
O flijadur evel o gloar
E voa labourad an douar.

III

Breman zo quent forz tud gentil,
Forz bourc'hiden, forz tud habil,
A zilez ar haëra kargou
Evit labourad an douarou.

IV

Nag a zouar fall dre ar bed
Eun deuz al labourerien de fonted,
A chenched he parkeyer kaër,
He chardinou, he prajeyer.

V

Henn or bro d'an haradigou,
Ha vez roed ivez priziou
Da neb ha labour ar goüella,
Koulz ha dar soudard vaillante.

VI

Pepeuz joa evit al labourer
Ho velled an nevez amzer,
He barkeier ag he brajou
Leun a foën ag a drevajou.

VII

Gant pebeuz joa ne vel quet
He guezeg, he zaout, he zevet,
He ne dieguez he kreski,
He leac'h heunan he deuz daou, tri.

VIII

Da vintin pa ya de barkou
Evit commanz he labourou,
He galonn ha ve ravissed
Dre ar c'hann euz al laboussed.

IX

He vouez a vesk gant ho moëziou
Evit kana meulodiou
Dan Doue leun a vadelez
Ha garg he barkerier a frouez.

X

Pa vel goudez poanniou kaled
He grignoliou kargued a id
Hevez heuruz a tranquill
Hag he tisquiz gant he famill

XI

He vicher a zo an nopla,
Hac ivez an necessera,
Dre ma brokur da beb unann,
Boed ivez, dillad da viska.

XI

He vicher a zo an nopla,
 Hac ivez an necessera,
 Dre ma brokur da beb unann,
 Boed ivez, dillad da viska.

XII

Henn dispud de boanniou kaled,
 He leun ann nerz, leun ha iec'hed,
 Hag eurussoc'h enn he veziou
 Hegued bourc'hissien hec'heriou.

XIII

Ha labourer he barz er meziou
 Ha vel a dra zur kaëra traou,
 Hevid na oufec'h da veled
 Er brassa ker demeurez ar bed.

XIV

Petra vouelfec'h er brassa ker,
 Tiez huel, paleziou kaër,
 Staliou leunn a horolachou,
 A vezer a c'hoariellou,

XV

Plassennou braz a re vian,
 Ruyou striz a ruyou ledan.
 Ha dre ruyou-ze a valez
 Tud curiuz, tu didalvez.

XVI

He barz he ker na vez hini
 He chom he unann en eun ti.
 He peb ti a zo bandennou
 He vel guenann er c'hestellou.

XVII

Nag ha drouz, nag ha c'holori
 Ha zo henon da handuri ;
 Henon morze, ni deiz, na noz,
 Ne gafec'h na peoc'h, na repoz.

XVIII

Henon an ër zo bilimed,
 Ha memeuz noazus dar iec'hed :
 Keriz a gar dont aliez
 Da glask an ër-vad var ar mez.

XIX

Eur bourc'hiz ag ha hel sevel
 Eur maneric pe eur c'hastel,
 A zeu denn zével er meziou
 Evit tremenn enann an naou.